

Breman 8, ru HOUCHE 35000 ROAZON

12 lrs

bremañ

HERE 1988 Niv.85

ROPARZ HEMON

1900 - 1978

12-19 *a viz Du* **1988**

BREST

PALEZ AN ARZOÙ HAG AR C'HENDALC'HIOÙ
P.A.C. - LE QUARTZ



*Gouestlet en deus
e vuhez d'ar brezhoneg*

TAOLENN

- Euskadi..... 3
- Korsika..... 4
- Un Indian e Breizh... 5
- Klasoù divyezhek... 6
- Sloveniz bro Aostria 7
- Keleier..... 8,9
- Dre ar vro..... 10
- Kemennadennoù..... 11
- Galianed ar Braden... 12
- Enez ar C'hap Breton..... 13
- DEUG ha CAPES..... 14
- Kador Dieub..... 15
- Levrioù..... 16
- DUDI..... 17
- Fajenn ar vugale..... 19
- MESK-DIVESK..... 20

pennadoù gant : M.B.R., Mari E. PIER, A.V. CHAPALAIN, J.Y. BROUDIC, MAB E DAD, Y.L., Lukian KERGOAT, Paol ar MEUR, M.A.M., Paskal ar MAR, C'HEG, GARAN AR MEUR.

Maketenn gant Lena Louarn, Mikael Baudu, Jil Killever, Nolwenn Louarn, Tangi Louarn, A.Vari Chapalain, Noela Olier.

Tresadennoù gant Malo Louarn, Kreston, M. Beyer

Luc'hskeudennoù gant Ekaitza, AV.C., Lena Louarn, J.Y. Broudic, Ouestr-France, C. Direr

Rener Breman M. BAUDU.

Moullet e ti O.S.C.R. Tachenn Meurzh - Roazon


EMBANNET GANT Skol An Emsav gant skoazell Ministrerezh Gall ar Sevenadur ha Kuzul Breizh hag al lenneerien

Kasit ho pennad, keleier, kemennadennoù... ar-rask ar Gwener 4e ar via Du! LIZI NIVERENN 85 BREMAN.

DEIZIATAER
1989

Kustumet eo an dud da vezañ bremañ gant an DEIZIATAER a vez kinniget dezho bep bloaz, e brezhoneg penn-da-benn gant Embannadurioù SKOL AN EMSAV.

kinniget brav ha dindan golo voulduz louet, degouezhout a ray diouzh yalc'h pep hini : ne gousto deoc'h nemet 35 LUR an tamm ! Kavet e vo koulskoude e-leizh a ditouroù talvoudus war ar peadeiz: taolenn ar c'hwec'h miziañ 89, niverennoù parrezioù Breizh gant an holl anvioù e Brezhoneg, roll ar c'hazetennoù dre skrid ha dre gomz, chomlec'h ar strolladoù sevenadurel, taolenn ar c'hemadurioù (talvoudus kenañ !), taolenn ar c'hilometrajoù etre kêrioù brasañ Breizh, deiziadur 1990 h.a.... hag evel-just ar c'harnedig da skrivañ chomlec'hioù ha niverennoù bellgomz ho mignoned.



NIVERENNOÙ-POST
PARREZIOÙ BREIZH

Goulennit DEIZIATAER 1989 digant Embannadurioù Skol an Emsav 8 ru Hoche Roazon (35 lur an tamm + 5 Lur frejoù) 30 lur an tamm adalek 10 deiziataer (+ 15 % frejoù kas) ha 25 LUR AN TAMM adalek 20 deiziataer gourc'hemennet.



99.38 75 83

PROFOU

Michel Keraotret 30 l, Paol Kerisit 80 l, Gilbert Kerouanton 30 l, Yann Fanch Jacq 30 l, J.J. Le Bris 30 l, Mikael Treger 80, Dominique Kervegant 80 l, Yves Jardin 30 l, Fanch Kerrain 30 l, Marcel Droual 30 l, Mikael Konk 30 l, Daniel ar Gevel 30, Roland Henry 30 l, Paol ar Meur 50 l, J.P. Le Blay 30 l, J.Y. Allain 30 l, Robert Rannou 80, Kristen Tonelle 80 l, Simone de Keyser 30 l, Lanig Jourdren 20, Jacques de Quelen 30 l, Rene ar Gleo 30 l, Mich Beyer 30 l, Michel Cadiou 30 l, Yves Guillou 80 l, Arnaud Viel 80 l, Loig Chapel 180 l, Erwan Olier 30 l, Roland Mogn 30 l, Gwenole Gevel 30 l, Gweltaz ar Bihan 30 l, Luce Loyant 30 l, Daniel Kernalegen 30, Doming Allain 30, Henri Leborgne 30, Bernard Cadoret 30, J.Y. Le Goff 30, Roland Verniseau 80 l, Y.B. Salaun 80, Fanch Jestin 80, Per Peneg 80, Yves Caroff 180 l, Michel Deligne 30, Alan ar Gall 30 l, Yann Rosmorduc 30, Jakez Merel 80 l, J.M. Mocaer 80, M.F. Leostic 80, M. Laure le Duc 30, Jean Boulbria 30, J.M. Mahe 30, Klaod an Duigoù 30 lur.

En holl : 2650 lur (miz Meurzh da viz Gwengolo 1988).

SETU un tamm mat sikour a-berzh hon mignoned, peadra da baeañ un hanter niverenn. Ur sikour a-bouez eo rak hep ho skoazell ne c'hellomp ket lasañ ar jiletenn e fin ar bloaz

Start eo d'ur gazetenn e -vel BREMAN padout gant an holl vizioù a sav pep tro. Ha ne c'hellomp ket ober hep sikour hon c'houmananterien. A-bouez bras eo dreist-holl pa dosta fin ar bloaz... Trugarez bras d'an holl.

Lennet en eus al lizher he deus skrivet an itron Soazig Daniellou er c'helc'h-gelaelouenn katalanek "Europa de les Nacions" ha soñjet en eus e c'hallfec'h harpañ ac'hanon dre ma fell din studiañ ho yezh dre ma gavfe mat kenskrivañ gant brezhonegerien. Diaes eo studiañ brezhoneg na-unan, ha goulenñ a ran harp e Breizh. Trugarez deoc'h.

Ma chomlec'h : Ao. Lluis Felip C/Hasia Pl. - P.C. BOX 114 - 08230 MATADEPERA - Bro-Spagn

STOURM

EUSKADI

BROADELOURIEN TOULLBAC'HET

E-kerz Gouel Sinema ar Mirenoezhioù dalc'het e fin an Hañv e Douarnenez ez eus bet kalz a gaoz diwar-benn Euskadi ar C'Heisteiz. Klevet hon eus anv eus ar waskerezh a-enep d'ar vroadelourien. Kontet zo bet eus bourevierezh, a zo c'hoazh siwazh dindan an "demonstradegoù yaouank". Ha meur a kratalezh yaouank. Ha meur a hini en deus bet tro da zizoneñ traou nevez, ken na oa mantret tud 'zo a anavez an klevet kement-all a draoù euzhus.



Manifestadeg e Baiona evit skoazellañ ar brizonidi

Siwazh, tudoù kaesh, en tu mañ ivez e vez gwel't traoù euzhus. Met petra reot ? Gouel ar Sinema an hini oa, ha en Hantnoz n'eus ket a filmoù. Aestret : evel-se ne oa ket ret kaozeal na menegiñ zoken ar stourm broadelour en **Iparalde**. Aesoc'h e oa rak e-mod all e vije bet savet jeu gant re ar C'Heisteiz. Aesoc'h e oa rak e-mod alle vije bet ret da Vreizhise sevel o mouezh evit e-bien osh politikerezh ar wask renet gant Bro-C'hall, kouz lavaret skoazellañ terroristed, Paotred E.T.A., daoust d'o fazioù, zo tud a-zoare, gouzañvet o deus dindan Franco ha mignoned Gwiriou Mab-Den o deus douzhañ ha truez outo. Met re **Iparaldek**... n'int ket sirius ! Na dareat, Gwelloc'h eo disoñjal anezho. Gwelloc'h eo chom da lenn West-torch ha chom hep gouzour netra.

Ha setu perak ha penaos e c'hell gouarnnant Bro-C'hall toull e-pad bloavezhioù (hep anezho !). Tri anezho (Ph.Bidart, G.Mouesca ha Lasca-ray) a vez dalc'het bepred "en digevnez". Unan (Trotte Etcheveste) zo bet nevez 'zo kaset lec'h ma veze graet bemdez war gant ar CIGN zo bet gloazet c'hagnet betek fin e vuhez. Ne oa ket a-valc'h evit Justis ar C'Hallaoued roz. Ekeit ez bet en-dro da Fresnes e-lec'h ma ya falloec'h-fallañ e stad.

Evit diskouez splann o c'henskazell d'ar 4 den-se, eo harz-debriñ. Kement-se dibabe

an 10 A VIZ GWENGOLO. Miz 'zo.

N'eo ket gwall chalet ar gouarnnant. Tost den ne oar, hag ar re a oar ne rannont grik.

Du-hont en Euskadi an Hantnoz ez eus bet hag e vo manifestadegoù liessert. Ha disoc'h'où an dilennadegoù diwezhañ n'int ket diaval evit an "Abertzale" (Mauleon 9 %, Espellette 10,9 %, Biarritz Est 7 %, Ustaritz 8,9 %, Baigorri 10,9 %, St Jean de Luz 7,13 %, St Pierre d'Arube 5,9 %, Hendaye 6,5 %, St Palais 7,95 %. Ar pezh a ziskouez n'eo ket ken splann ha ma lavar Ministrerezh an Diabarzh an troc'h etre ar bobl hag ar vroadelourien.

Er mare-mañ e vez kaozeet kalz eus Pinochet war ar c'hellaouennoù hag e-burz an Tele. Ar socialisted o deus kaset duhont tud da evezhañ doare ar referendom. Gwiriou Mab-Den a-tav. Pegen bras al loustoni kuzhet dindan an anv kaer-se ! Foeltret ar Gwiriou Mab-Den e Bro-Frañs ? Morse !

An otrou Arpaillange da skouer, zo ur gwir demokrat anezhañ, ha frei kosh Tonton, an arbennigour nemetañ war an danvez ! Met ne c'hellont ket be-

zañ re gentil gant terroristed, memestra ! Gant enebourien ar Frañs peurunvan ! Neuze, evit ar Gwiriou Mab-Den-se e vo ret gortoz... ur pennad mat.

Ha c'hwi, Breizhiz, a-du 'moc'h gant ar c'hoari-se ? N'eus ket ken pell ez eus bet Breizhiz toullbac'het ivez. Disoñjal a reer buan.

Tu zo da gaout titouroù en ur skrivañ da : Association Ahaideak (kevredigezh skoazell familhoù ha mignoned ar brizonidi) - Gernika - Quartier Harburu - 64122 Urugne - Euskadi.

M.Br. KEMENNADENN

EMGANN, emsav evit dieubidigezh vroadel Breizh hag ar sokialouriezh a harp frank emsaverien bac'het Euskadi en o enzalc'h, hag a c'houlenn, asamblez gante, achuñ gant leusker prizonidi o-unan penn ha dieubidigezh Trotte Echeveste.

EMGANN a lavar en-dro bezañ a-du krenn gant an emsav evit dieubidigezh vroadel Euskadi.

STOURM

KORSIKA

KUZUL KORSIKA A ZEGEMER UR MENNAD KINNIGET GANT



Krouet ez eus bet e miz Gwengolo ur C'huzul etrevinistrel e karg eus diorroadur ekonomikel, sokial ha sevenadurel Bro Gorsika, ha bodet eo bet evit ar wech kentañ d'ar 6 a viz Here...

Hervez kemennadenn Matignon e vo roet skoazell ar Stad d'ar Gorsikiz da renkañ kudennoù kevredigezhel an enezenn...

Lavarout a ra ivez e oa bet divizet gant ar Iañ Ministr kregin gant un obererezh war hir dermen diwar-benn kudennoù kelennadurezh ar c'horseg...

Betek-hen e oa an Ao. Joxe hepken e karg eus an "aferiou

korsikat", bremañ ez eo ar gouarnamant en e bezh. En ur ober war-dro kudennoù Korsika e-keñver diorroadur ekonomikel ha sevenadurel, e-keñver reizhañ ar vuhez politikel, e soñj ar gouarnamant n'en do mui an FLNC "Falsabegoù" da adkregin gant ar feulster...

Degemeret mat eo bet krouidigezh ar C'huzul-se e Korsika, zoken gant izili strolladoù brudet evit o jakobinelezh :

"Orañs Korsika hiriv an deiz eo e tivizfe ur gouarnamant nevez savet (tri miz hepken) pledin en un doare realitek gant e vinniatred war gudemnoù ur rannvro. Pouezus-bras eo. Ur c'hais eo da Gorsika !", a lavare an Ao. Pierre Pasquini, dileuriad R.P.R. eus Korsika-Uhel. Lavaret a ra ivez e ve mat kenderc'hel gant an harz-brezel ha komz gant kement hini a zo prest da gomz "Breutaat a c'hel -ler war gemet tra, war-bouez ar feulster hag an dtaals'hidigezh".

D'an 20 a viz Gouere e oa bet kinniget ur mennad da Guzul Korsika gant ar Strollad broa-

delour A Cuncolta Nazionalista, Etre ar meurzh 11 hag ar yaou 13 a viz Here o deus an di-dileuriad divizet diwar-benn ar skrid-se, hag an holl anezho a oa a-du evit ma vefe eus an diviz-se.

Er mennad-se e kaver ar c'hrefen pouezusañ e politikezh Korsika : anaoudegezh pobl Gorsika, reizhañ ar vuhez politikel ha li stennou an dilemmerien. Fellout a ra d'ar vroadelourien ne c'hellfe bezañ enskrivet da votiñ e Korsika nemet an dud a veve e Korsika, padal e vez evit ar mare tud an "diaspora" o votiñ evit difennerien ar c'hlanou. Fellout a ra dezho ivez e ve graet an diforc'h etre broadelezh ha keodedalezh.

Votet eo bet ar mennad-se, gant un nebeut cheñchamantoù, gant ar muiañ niver a-bell : "Bezañ 'eo eus Pobl Gorsika ur gemetiezh iselonek ha sevenadurel bev o vodad Korsika a orin ha tud deut da vezañ Korsika (...). Kuzul Korsika a fell dezhañ difenn gwirioù Pobl Gorsika da zerc'hel d'he dibarelezh sevenadurel ha da zifenn hec'h interestoù ekonomikel ha sokial dezhi hec'h-unan, e-barsh Bro-reizh ar Frañs. 44 moush ar-da ha 10 a-enep... Degemeret eo ar mennad". E-vele-se e klose kadouriad Kuzul Korsika, dileuriad RPR eus Korsika ar C'hreisteiz, Jean Paul de Rocca-Serra, an diviz en doa padet 14 eurvezh.

Ar gomnisted n'o deus ket kemeret perzh er votadeg abalamour ma oant a-enep ar c'hinnigoù ekonomikel a oa er mennad, dreist-holl diwar-benn sistem an tailhoù ; padal e soñj dezho ez eus eus Pobl Gorsika hag eus he dibarelezh. Ur bilhed gwenn 'z eus bet gant un dileuriad 'z eus an RPR. Ar re nemete o vezañ a-enep krenn a oa dileuriad an M.R.G., o deus votet a-enep d'ar mennad " peogwir ne vese ket lavaret ennañ eo eus Pobl Gorsika lod eus pobl Frañs".

E-korf c'heve'h miz e tle bezañ savet bremañ ur raktres a ziorroadur ekonomikel, sokial

UN INDIAN MOHAWK E BREIZH

AR VROADELOURIEN



ha sevenadurel, da vezañ resisaet en ul lezenn-program savet gant ar C'huzul etrevinistred.

Evit ar pezh a sell ouzh ar yezh, e lavar ar mennad ez eo a-du ar C'huzul " evit ma vo kelennet ar c'horseg adalek ar skol-vamm betek ar skol-veur, evel un danvez da vat, en ur heuliañ alioù mennad Kuzul Europa (*) war ar yezhoù minorel pe rannvroel".

Bremañ n'emañ a-du tost an holl e Korsika, zoken an tu dehou pellañ gant an Ao. Pascal Arrighi (skarzh et ou an F.N.), ez eo ret d'ar gouarnamant ober e labour.

Laeuen eo ar vroadelourien pa 'z eus bet un diviz diwar-benn ar mennad-se ha pa 'z eo bet votet. Un diazezh eo evit divout pelloc'h ha sioulaat an traoù ivez, evel m'en deus graet an FLNC abaoe un nebeut mizvezhioù.

E-keit-se, e c'heller en em c'houlenn petra 'ra Kuzul Rannvro Breizh, hag ivez ar MIDAB (Mission Interministérielle pour le Développement et l'Aménagement de la Bretagne).

Ovir eo, n'eus ket an hevelep keñver-nerzh, n'eus dileuriad breizhat ebet oc'h ober reizh evit ma vo anaouezet Pobl Breizh ha pledet gant he c'hudennoù ekonomikel ha sevenadurel. Peogwir, a-benn ar fin, e Nanaky hag e lec'h all, ne asanter divizout ha ne glasker an "digeridigezh" hag ar "c'hon-sensus" nemet pa vezer rediet.

Mari. E. PIER

(*) Siwazh ez eus kalz a "ma vez posubl, ma'z eus tu..." er mennad-se. Hag ouzhpenn-se, e Europa termeniñ hec'h-unan an "Karta Europa ar Yezhoù Minorel pe rannvroel", hag e vo barnet c'huzul "tud varrek" dibabet war rolloù kinniget gant ar Stadoù a-uman (s.o. lodennoù IV ha V ar Garta).

D'oust d'e anv, ez eo Ron Lafrance, Indian, eus Broad an Iroquois, hag evit bezañ resisoc'h "MOHAWK". Dont a ra deus ar Stadoù Unanet e-lec'h ma 'z eo rener ar Program Indian e Skol Veur Cornell e norz ar Vro. Genidik eo deus ur geriadenn 7000 den du-hont, war ribl ar ster "Sant Laorans". E Kemper edo d'al lun 10 a viz Here, pedet gant ar Mirdi Breizhek ha "Daoulagad Breizh".

BEZAN MESTR WAR O DOUAR

Unan eus ar c'hudennoù pouezusañ evit an Indianed eo gellout chom mistri war o douaroù. Er C'Hanada n'int ket mui. O aferioù a sell eus "Burev an Indianed". Met en U.S.A. ar MOHAWK a zo bepred mestr war -no o-unan. N'int stag ouzh fram ebet. Daoust da se, ez eus emgannoù etrezo hag ar gouarnamant.

Kudennoù e-leizh a sav koulskoude : betek-hen ne baent ket a dailhoù, na war ar govr, na war an douar. Ar gouarnamant a fell dezhañ cheñch an traoù ha mont a-enep "lezenn-diazezh" Bro-Amerika. Ar bloaz-paset eo bet aozet ur symposium evit lidañ "Lezenn-Diazezh" Bro-Amerika gant an Iroquois, prezegennoù zo bet distaget evit diskouez e oa bet kemeret perzh gant an Indianed evit levezoniñ skrid al "Lezenn-Diazezh" pa 'z eo bet savet.

Ur gudenn all : Ron a lavar : Ne c'heller ket asantañ em befe ezhomm kaout papertoù evit gwelet ma "breudeur" en tu

all d'ar ster, an harzoù n'eus ket diouto evidenn.

N'ON KET DEUT DA VREIZH DRE GANOE

"Mard eo pouezus 1992 evit Europa, ez eo evidomp ivez, a lavar Ron, lidet e vo neuze 500vet deiz-ha-bloaz Christophe Colomb. Met c'hwi oar ni a yas war-raok kalz araozhañ, ha kenderc'hel hec'h-unan war-lerc'h ivez, arabat soñjal esomp c'housh gant plu hag all...Eit dont ennañ ez on deut dre gann-nij ha n'eo ket gant ma c'hanoz !"

"Ar pezh a gont eo gouzout petra a zeuimp da vezañ er 500 bloaz da zont. Diaes eo deomp kas war-raok hon skoltou, un tammig evel Diwan e Breizh, ha koulskoude e klaskomp sevel un ekonomiezh, met use eo diaes an traoù. Eglevioù hon eus gant broadoù all. Ar "CREEES" o deus bet arc'hant war-lerc'h stanket Sant James, neuze e savont un arborzh gant o linennou kirri-nij, hag e klaskomp implij anezho da skourer."

Er mare-mañ ez eus 80 000 Iroquois ha 40 000 Mohawk en USA hag ar c'hantved a zeu e vint div wech niverusoc'h. E-vint eus ivez enatradur an endro, met ret e vefe kaout un nozvezh all evit komz eus se".

A-du e oa an holl re deuet d'ar mirdi d'e selou, ha spi o deus e tevio end-dro Ron Lafrance.

A.V.C.

AR C'HLASOU DIVYEZHAK



Setu amañ roll ar skolioù hag ar c'hlasoù divyezhek e stad n'emaint e penn ar bloaz :

- Kawan** (22) Skol-vamm 11 bugel,
- Lanuon** (22) skol-vamm 80 bugel, 1añ derez
- Landerne**(29)skol-vamm 14 bugel, ha C.P.
- Pondi** (56) skol-vamm 25 bugel, CP-CE2
- Lanester**(56)1añ Derez 16 bugel,
- Rostren**(22) skol-vamm 23 bugel, CP-CE1
- Roazon** (35) 1añ derez C.P.-CM2 56 bugel,
- ST Riwoal**(29)skol-vamm 1añ derez 30 bugel.

En holl : eizh skol, seitek klas ha 260 bugel. Kenderc'hel a ran an traoù da vont war-raok eta, gant bugale niverusoc'h, klasoù nevez er skolioù kozh ha div skol nevez.

N'eo ket digoumoul na sklaer an oabl evit-se. Ar c'hudennou er bloaz-mañ :

-En Aodoù-an-Hanternoz, e nac'h an Enseller degemer ar vugale dindan 3 bloaz (e Kawan) (hag e Rostren). Un digarez da zougen klemm dirak al lezvarn velestradurel.

-E Tregastel (22), e oa 20 bugel prest evit ur c'hlas divyezhek ouzhpenn. N'eo ket bet

digoret gant an Enseller.

-E Redon (35) eo bet nac'h het ouzh an dud a c'houlenne kement all.

-E Lanester (56), n'o doa ket bet a respont ar familhoù abaoe daou vloaz; gant ar c'helaouennoù o deus klevet e vefe ur post brezhoneger e skol Romain Rolland; met d'an diwezh, eo deut da vezañ un hanter-bost

-E Roazon, n'en deus ket dalc'h het ar Rektor d'e c'her e-keñver an divyezhegzh en Eil Derez : studiet e vez ar brezhoneg evel eil yezh kentañ mestra er ôvet klas : 3 eurvezh kentel bep sizhun.

Arabat disoñjal ouzhpenn e vez desket brezhoneg er skolioù publik gant :

3000 bugel en Eil Derez, ha 6000 bugel er c'hentañ derez

Bep bloaz e vez kaset pa-erioù bruderezh ganeomp en holl skolioù-se. Un doare evedus da vont war-raok a vez implijet gant familhoù bugale ar c'hlasoù divyezhek : ober bruderezh evit ar brezhoneg, sevel un enklask (ha n'eo ket kas goulennoù hiniennel), goulenñ ez-ofisiel war-lerc'h, brudañ an afer, ha pouezañ war an Deskadurezh da c'houde. Ha ne c'hellfe ket an daoreoù-se talvezout evit an eil derez ivez?

APEEB/KTKB BP 25 35025 ROAZON

SLOVENI

Ar Sloveniz a zo ur bobl dispartiet etre peder vro: Bro Yougoslavia : 2 000 000 anezho (8 % eus ar boblañs), kerbenn : LJUBLJANA. Bro Italia etre 20 000 ha 40 000, tro dro da d-TRIESTE, Bro-Hungaria : war dro 5.000, ha Bro-Aostria etre 20 ha 60 000.

E kreisteiz ar vro emaint o chom en ur rannvro anvet KARRINTHIA, bro ar menezioù hag al lennoù-dour.

N'eo ket ar Sloveniz ar muiañ-niver er rannvro-se (560.000 den); staliet emaint dreist-holl war an dachenn etre an DRAU hag an harzoù (sellet ouzh kartenn Aostria).

74 000 Sloveniad a oa disklriet e 1910, pa ne vefe ez-ofisiel nemet 20 000 hiriv an deiz. War gil e ya ar yezh eta (1).

AN ISTOR

HAG AN ENDO POLITIKEL

E 1938 e oa bet aloubet Bro-Aostria gant HITLER ha chom a reas dindan gwask an nazied betek 1945, dalc'h et voe neuze gant armeoù soviedel ha re broioù ar C'hornog. E 1955 e oa bet sinet un emglev-stad etrevroadel a anavez dizalc'hed ar vro, ar mennad 7 anezhañ o vegenñ gwiriou ar Sloveniz hag ar Groat e chom e Bro-Aostria -war dachenn an deskadurezh dreist-holl.-

Azalek ar poent-se eo bet gwelet strolladoù politikel an tu dehou hag an tu dehou pellañ (nazied) o tacañ ar gwiriou roet gant ar Stad d'ar Sloveniz.

Diouzh an tu all, ar strolladoù kreiz pe kleiz n'int ket bet troet da zifenn start ha groñs yezh ha sevenadur ar Sloveniz, gant son da vezañ tamallet dezho bezañ komunour hag a-du gant TITO (bezañ "Titoour" a zo bet implijet eno e stumm "Breiz Atao" amañ). Er votadegoù diwezhañ eo bet dilennet ur c'han-

POBLOU

BRO AOSTRIA

nad sloven e Parlant VIENNA evit difenn menozioù ar re C'hlas hag ar Sloveneg.

Stad ar yezh er skolioù ha war ar gwagennoù (sellet : framm amañ dindan).

War ar poentoù-mañ dreist-holl e vez hag e veze krogadoù etre ar Sloveniz hag ar strolladoù politikel :

AN NIVEREDIGEZH : an tu-dehou a c'houlenne anezhañ, ar Sloveniz avat a nac'he pa ne felle ket dezho bezañ rediet da ziskleriañ gouzout ha kaozeal ar yezh, pezh a oa dezho heñvel ouzh un doare kontroll gant ar velestradurezh. E 1976 eo bet graet memestra : 21 000 nemetken a zo bet kontet.

AN DIVYEZHEGZH WAR AR PANNELLOU-HENT : brezel ar panelloù a rae e reuz e-tro 1972, met kaset e oa da benn gant KHD (strollad an tu-dehou), a zistruje ar panelloù divyezhek. Hiriv ne vez gwelet hini ebet ken er vro.


AN DIVYEZHEGZH EN DESKADUREZH : abaoe 1983 e c'houlenn strolladoù an tu dehou e vefe dispartiet ar Sloveniz bihan diouzh ar vugale all, hag e vefe skolioù distag evito. Ne felle ket d'ar Sloveniz kennebeut bezañ dispartiet, kenderc'hel gant an divyezhegzh kentoc'h. Daoust d'ar skoazell gant meur a strollad, daoust d'ar manifestadegoù (betek e VIENNA), eo ret dezho plegañ ar bloaz-mañ ivez.

Sed aze un nebeut krefen hag a zo danvez-prederiañ evit kement hini a zo boaz da gaozeal eus ar "gwir da vezañ disheñvel"...

J.Y. Broudic

(1)bezañ Slovenad e Bro Aostria a dalvez kement ha bezañ disme-gaset war dachenn al labour hag ar gwiriou keodedel.

G.S. : ur romant eus ar vro troet e galleg : "L'élève TJAZ" gant Florjan Lipus (troet gant Peter Handke hag A. Gaudu).



SKOL EIL DEREZ SLOVENEK E KLAGENFURT STAD AR YEZH ER SKOLIOU

Setu amañ ar sifroù evit warlene :

- Skolioù mamm divyezhek..... war-dro 200 bugel
- Skolioù kentañ derez..... 1200 bugel
- Skolajoù..... 200 bugel gant kentelioù
- Skolajoù-Lise..... 460 en ur skol slovenek e KLAGENFURT (kerbenn ar Vro). Ar skol nemeti-se a zo meneget en emglev-stad 1955, ha gwarezet gant se : ar milvet bugel a zo stummet ganti abaoe 1955 ar bloaz-mañ.
- SKOL-VEUR : war-dro 100 studier. Kalz a Sloveniz a zo e-karg e skolioù-meur Bro-Aostria.

Stad ar yezh war ar gwagennoù :

- Radio : tri-c'hard eur benreiz etre 18e ha 12 e, ha bep pemzektez : 1 eur etre 21 eur ha 22 eur.
- T.V. : netra betek-hen. Kregiñ a raio abadennoù e miz Genver 1989, 20 mn e penn kentañ, 30 mn ar bloaz war-lerc'h. Savet e vez an abadennoù e Klagenfurt.

KELEIER

MELAN: A-ENEP COGEMA



Kevredigezhioù all zo bet o skrivañ d'an INSEE da c'houlenn e ve niveret ar Vrezhonegerien: ar C'hevrec'h, Keltiek, Diwan, Ar Falz, UDB. Evit Skol An Emsav ha Kuzul ar Brezhoneg n'ouzomp ket c'hoazh.

Tud zo a seblant krenn a-enep, gant aon ma tiskouezfe pegen gwan eo stad hon yezh. Gwell e kavont mouchañ o daoulagad dirak ar wirionez hag al labour da ober. Met n'hallomp ket derc'hel gant huñvreoù diwar-benn ur Vreizh n'eus ket anezhi ken, pe ne savimp biken tra badus ebet.

Evit bezañ efedusoc'h e pedomp bremañ ar c'hevredigezhioù da skrivañ d'ar Ministr Kentañ a zo ivez prezidant "Kuzul Yezhoù Bro-Frants".

Kement-se en sikouro mar-teze da respont d'ar goulnenn dre skrid en deus savet Didier Chouat, Kannad P.S. Loraog war an divout. ■

Ur c'houmananter eus Roazhon en doa bet c'hoant, iskisat froudennd, da bremañ digant an "Documentation Française" ul levrig gwir ("La Justice Administrative en Pratique", ma fell deoc'h gouzout). Hag eñ kas ur chekenn vrezhonek d'an ti-embann stadel-se.

Ur pemzektez goude e reseve ul lizher o c'houlenn digantañ reiñ e chomlec'h e galleg... rak e brezhoneg (e-vel a c'hallit kaout ivez) e oa e chomlec'h war e chekenn evel war e lizher-urzhidiñ. Hag eñ respont e oa mat a-walc'h evite da gas al lizher.

Eizhtez war-lerc'h e reseve e levrig gant e chomlec'h... e galleg, petra oac'h o c'hortoz ?

Saludomp holl ar skouer uhel-se a bennegezh. ■

gortoz, karget ma oant da wareziañ mekanikoù ar gompagnunezh. Prezidant Kuzul Bubri a laoskas neuze ur skrid etre daouarn paotred o fuzuilhoù da reiñ d'ar Prefed. Ha kaset kuit ar gerzherien d'ar gêr.

Da noz en em vodas Kuzul-Kêr Melan, ha votet e voe a-enep kleuzidennoù COGEMA. En em welet a ray holl vaered ar parrezioù laket en arvar gant COGEMA a-raok mont da welet ar Prefed. ■

BERR HA BERR

100 lur e koust lodennoù ar G.F.A. savet gant Kuzul Bubri a-enep d'an uraniom, ha paret ez eus bet lod gant un nebeud kevredigezhioù sevenadurel evel "Unvaniezh ar Gerzherien Brezhoneg" hag "Rouzeganed Kevredet" Roazon.

Un doare fetis da liammañ ar stourm sevenadurel hag ar stourm evit buhez Kreiz Breizh. Lakit ho kevredigezhioù d'ober heñvel, ha skrivit, e brezhoneg evel just, da G.F.A. Brehedigan Bubri, Ti-Kêr, 56310 BUBRI.

HA KELEIER NOZ

Dizezhat diouzh an noz, abred diouzh ar beure, den ne oar, eo tremenet paotred SAB dre RBO. Emichañs o doa gwelet ur goulou bennak a bede anezho da zont e-barzh koulskoude e oa pignet do-riou an ti, dipitet ar baotred n'o deus kavet netra gwelloc'h nemet da lakaat un tam-mig buhez war talbenn louet an ti ha war kirri nevez flamm RBO da zisplegañ pegen laouen e oant.

Ha c'hoazh ma vije bet skrivet gant an tri liv e-giz arouez an ti, met nann, e du e oa, du e-giz pennoù bras ar radio p'o deus dizoloet an torfed. Ne gomprenet netra, int hag a lak kement a boan d'ober eus RBO ur radio breizhek, int hag a lak an div

yezh keñver ha keñver en ur skoazellañ ar muiañ ma c'hellont ar brezhoneg er skin-gomz.

Soñjit ta ! Ar radio nemetañ oc'h ober abadennoù brezhoneg e Breizh (hervez un nan diouto), div eurvezh hanter bemdez, pa n'eus ket melldroad pe un nozvezh votadeg bennak !

Pegen diseven e c'hell bezañ ar Vreizhiz.

Ur ger evit echuiñ, dre c'hañs en em gave jubenourien eus ar vro dre aze ar mintinse, a-hend-all e vije chomet digomprenus an enskrivadurioù kevrinus evit pennoù bras ar radio. ■

MAB E DAD

A-dra-sur, n'eo ket dre zegouezh" ma 'z eus bet un darzhadenn e Pondi ha livadegoù e R.B.O.e Kemper er memes nozvezh.

Setu aze ar pezh a vez brudet gant polis ar gouarnamant gall, hervez ar gelaouenn "La Liberté du Morbihan", bet embannet d'ar 17 a viz Gwengolo.

Degas a reomp da soñj e oa bet klasket tamall da Stourm ar Brezhoneg an tanguall hag en-doa distrujet ti-post Lannuon e miz C'hwevrer diwezhañ.

Diskouez a ra ez int tud troet fall o spered, prest d'ober forzh petra evit dirvudañ ar Brezhoneg ar gerzherien evit ar yezh. Un doare psikopatek a zo aze hag a vefe mat da gaout un diskoulm e ti ur psikiater.

Stourm ar Brezhoneg a embann sklaer an traoù-mañ :

- ne vez ket skrivet S.A.B. evel A.R.B.,
- disheñvel-tre eo ur gwispon diouzh ur bistolenn,
- ober a reomp gant ar Brezhoneg ha gant gwisponioù, ne reomp ket gant binivoù all,
- n'omp ket ur strollad kuzh,
- Stourm ar Brezhoneg a stourm war dachenn ar yezh, evit ma vo lakaet ar BREZHONEG da YEZH OFISIEL. ■



Emañ ar strollad GAB-FESTOU eus Sant Nazer, o klask sevel ar c'hentañ C'HOARIOU SPORTEL POBLOU EUROPA e 1990, e Breizh, gant sportoù mod kozh ha sportoù nevez.

Bodadeg a vo d'an 29 a viz Here 1988, eus 3 eur da 6 eur goude kreisteiz, e Ti ar Bobl, e Sant Nazer, da gomz hiroc'h... e galleg, petra oac'h o c'hortoz ?

Saludomp holl ar skouer uhel-se a bennegezh. ■

Bruderezh kaletez Pleiben, war ar skinwel, a ziskouezze Breizh dindan ar glaveier bras ken o deus klemmet paotred an touristelezh hag ivez politikierien ar vro.

Hini ebet avat n'en deus savet e vouezh da embann e oa mezhus bezañ laketañ ur post brezhoneg er c'h-"Capes" er bloaz-mañ.

Ar Brezhoneg evito a dalv nebeutoc'h eget ur pakad kaletez Pleiben ? ■

S.A.B.

36-15

KILAQUINN TC / KELA

Kazenn deizmaek brezhoneg - galleg

- Keleier ar vro
- Gouelioù, Festoù noz
- Levrioù nevez embannet
- Skol Ulbe Ar Vro
- C'Hoarioù

ARKEOLOGIEZH

GALIANED AR BRADEN

SEKREDOU DA ZIZOLOEIN



-pad an hañv ez eo aet war-raok ar furchadegoù er Braden c'hoazh. 25 stajiad o deus kemeret perzh el labourioù, darn vrasañ anezho a zo studierien en arkeologiezh e Barselona, Madrid pe Breizh-Veur, daou gelenner gresian o tont deus Atena a oa deut ganto. Echuet eo bet labourioù an hañv e kêriadenn ar Braden e fin miz Eost, ar furchadegoù a vo echu da vat e 1989.

UR GERIADENN GANT DIV PE DEIR FAMILH E 120 A-RAOK J.K.

Abaoe 1982, dre furchal er Braden, un eus ar chanterioù kentañ e Breizh, ez eus bet dizoloet ur geriadenn framat. Div pe deir familh a veve aze war un dachenn klozet gant ur seurt moger. Al lec'hioù a zo dispartiet mat tre : e kreiz an tiez-bevañ gant ar plasoù evit ar greun ha tostoc'h diouzh ar voger-diaevaz ar chatal hag ar grignolioù ed, keroc'h hag all.

An antre zo diskouezet gant un troc'h er fos don war 4 pe 5 m. Ar pezh a laka da soñjal ne oa ar voger nemet evit

kaout goudor ha n'oa ket evit en em zifenn. Un nebeut bezioù bugale zo bet kavet ivez e-kiichen an tiez, ar vugale a oa interes er geriadenn betek 12 vloaz ha ne oa ket er vered a oa sur mat en diavaez.

Mein a zo bet kavet ivez deiziataet eus ar mare roman zo bet dizoloet gant fozioù, ha dindan ar re-mañ rooù all eus mare ar Gelted hag aze e teu da vezañ diaes al labour : klask tammoù priajoù a vo priziuz-tre evit an analizoù da zont.

AR FURCHADENNOU : HIR HA DIAES

Skeudenn Epinal ar fuchadennoù a chom sanket e penn an dud a zo an den e-unan o toullañ douar gant ul loa vihan. Amañ ez ees founnusoc'h gant palioù. Jean Paul le Bihan, arkeologour Ker Gemper a zispleg "ober a reomp ur bern labourioù e-pad an hañv pa z'omp niverus, plijusoc'h eo, a-wechoù ez eo ret fiñval betek 4 domen douar bemdez dre zen, hag ouzhpenn ez eo ret toullañ o vesañ bepred war ovesh evit chom hep terriñ un dra bennak."

BETEK PENN MERKOU AN DEN

An arkeologour en deus da bal klask gouzout holl oberennoù an den, war e endro, hag e c'hell evel-se, gant tammoù pri pe kleuzioù ha fozioù gouzout penaos e oa buhez pemdeziek hom hendadoù.


E Breizh ez eus bremañ unnek chanter a-seurt-se, ur vro sellet evel o vesañ e penn arak war dachenn Europa. Setu amañ sav poent Jean-Pierre Le Bihan "ur bern kentelioù hon eus da demañ diouzh al labour-se, sevenadurioù 2000 vloaz-se, ar strolladoù tud-se o doa kudennoù ha darempredoù soktal lusiet, pell eo da vesañ ken simpl ha diskouezet e-barzh Asteriks."

A.V.Chapalain



ESTRENVRO

ENEZ AR C'HAP BRETON



N'eus ket ezhomm da sammañ ar c'hirri war ar bigi evit treuziñ ar strizh-mor a ra an dispartiet etre an douar bras hag Enez ar C'Hab Breton. Dre vont gant ur sav-mein e te gouezher e tolead divoutinañ Bro Skos Nevez.

En ur skeiñ trema an hanternoz e kammigeller etre tosennoù koadek ha serzh, bevennet gant lenneier a bep ment. Eno, e-harz an tevnen a oa savet warnañ e genkiz, e arnodennas ar c'havadennet brudet Alexander Graham Bell, ar vag dre viñs kentañ.

Goude dezho bezañ bet pilet e Akadia an douar bras gant ar saozon e savas ar c'hallaoued ur geoded ramparzh war an enezenn, Louisbourg hec'h anv. Bennozh d'ar moru e oa brav ar stal gant bourc'hizien an drevadenn. Etre 1733 ha 1743 e tremene ouzhpenn 200 lestr dre mullg ar porzh bep bloaz. Dre ma ne oa ket gwallstrujus parkeier an tolead e voe kaset trevadennerien da hadañ douar ruz Enez Sant Yann (Enez ar Prais Edward abaoe 1779) evit pourveziñ ar geoded a voued. Ur c'hwitadenn e voe. Re start e oa d'an difraosterien terriñ naon o c'hrouadurioù evit ma teufent a-benn da gargañ taolioù annezidi Louisbourg.

E 1758 e tagas ar saozon an drevadenn Goude bezañ trec'h war ar c'hallaoued e tivizas mistri nevez an enezenn diskar ar c'hrevlec'h. O vesañ ma tifenne dija porzh-brezel Halifax broioù an arvor ne dalvez ket ar boan lojañ rejimantoù en Enez ar C'Hab Breton. Tost daou gantved war-lerc'h e voe adsavet an darn eus Louisbourg evel ma oa e 1744. Tud gwisket evel gwechall a ra an neuz da vevañ, da labourat er straedoù kozh evit plijadur an douristed.

Skarzhet er-maez ar c'hallaoued e voe trevadennet an enezenn gant skosis. Ha yezh keltiek ar saverien deñved da dregerniñ e stankennoù don Douareier Uhel ar C'Hab Breton. Dres hanter kant vloaz 'zo e voe savet eno ar skolañ nemetañ en Amerika an Hanternoz a vez graet ennañ gant ar gouezleg. (The Gaelic College, St Ann's, Cape Breton, Nova Scotia, Canada BOE 180).

Estreget kelted a zo o chom er vro. Bez 'zo indianed mikmak war ribl lenn "Vras d'Or" hag akadianed war an aod. E 1775 e voe harluet gallegerien an toleadoù gouezet gant ar saozon e 1713. Dre ma nac'he an akadianed bezañ sujidi roue Breizh Veur e soñje dezho an alouberien ne vefent ket pell

oc'h en em sevel a-enep d'o galloud. Kerent hag echu ar brezel (*) e tistroas darn eus an harludioù d'o bro c'henedik. O vesañ ne voe ket restaolet dezho o farkeler e voe ret dezho difraostañ reoù all. Sevel a rejont div barrez war Enez ar C'Hab Breton : Cheticamp en hanternoz hag Isle Madame er c'hreisteiz. Panevet enañ ar glaveier trenk o tistrujañ tamm ha tamm koadier divent broioù an arvor e c'hellfe o diskenni-di kaout an eur da vevañ en ur c'hornad bamus.

Paol ar Meur

2010

STAJOU WAR AN URZHIATAEREZH

35000 Roazon - Da gaout titouroù skrivit da : OSCAR X2000 - Pôle Central - 6 bali ar re Unanet - 35043 Roazon Cedex - pell : 99-35.11.11.

KELEIER

DEUG HA CAPES



E 1982 e oa bet krouet er skolioù-stad, ar c'hentañ klasoù divyezhek brezhoneg-gallec. 16 anezho a zo bremañ er vro (met hini ebet e Liger-Atlantel...) hep na vije bet graet an disterañ tra gant an Deskadurezh-Stad da stummañ mistri ar c'hlasoù-se ! (Emsaverien eo ar re a zo o labourat enno, tud dibabet ganto en em stummañ diwar o c'houst).

Hiviziken eo aet da hesk andon ar "skolaerien emstummet-se", lonket prim gant tachenn sec'h ha pizh ar veles-tradurezh c'hall. Ha brav eo dezhi bremañ mont gant an arguzenn doull-se da nac'hañ digeriñ klasoù en desped da lezenn Savary (mizheven 1982)

Abaoe 3 bloaz koulskoude ne baouez ket Unvaniezh ar Gelennerien Brezhoneg da sachañ evezh ar vinstred, o tont an eil war-lerc'h egile, war an diouer a gelc'hiad-studi kentañ (2 vloavezh) e brezhoneg er skol-veur, gant an DEUG BREZHONEG e penn, evel dibab evit an danvez-skolaerien e touez an holl DEUG-où kinniget dezho dija.

Ur c'hwezigeall doulet e teufe an aotreegezh vrezhoneg -bet gounezet e 1981- da vezañ ma ne c'hellfe ket kemer harp war an DEUG-se.

Gwshoc'h c'hoazh : ke-vrennoù keltiek ar Skol-Veur, talvoudegezh ar c'h/CAPES brezhoneg hag ar c'hlasoù div-yezhek eo a yafe da goll, hep ur seurt DEUG. Ne vo ket stris-hoc'h hemañ evit an DEUGoù all a zo dija : e Saozneg, Katalaneg, pe Gorskigeg ; ret eo ha mall a zo !

AN DEUG BREZHONEG an hini eo a roio e dalvoudegezh d'hon labour evit ar brezhoneg er skol. Hervez ar respont a vo roet deomp gant ar gouarnamant e vo barnet ga-neomp e emzalc'h a-bezh e-keñver hor yezh !

U.G.B. Here 1988

Kuzul ar Brezhoneg

S etu program an hanter-"gapes" brezhonek evit ar bloavezh 1989. Evit al lodenn gentañ e vo da studiañ ar memes levrioù ha warlene, da lavaret eo "Buhez Mad-Den", "Levr al Labourer", gant Joakim Gwilhom, eil levrenn "Kontadennoù ar Bobl", gant Fañch an Uhel, oberoù Prosper Proux hag "Itron Varia Garmez" gant Youenn Drezen.

Evit an eil lodenn, dre gomz ez eus kemm avat. Studiañ a ranko an dud kalonek "Pesketaourien Douarnenez", gant Gwendal Denez, "Enez Eusa" gant Padrig Gouedig, ha "Douarou e-tal ar mor" gant Armelle Audic.

An dud kalonek, a lavaromp, rak 1 post hepen a zo bet laket er c'hapes er bloaz-mañ, gant ar Jospin, dres evel warlene, gant ar Monory. "Les socialistes refusent les diminutions de postes de Breton", a oa skrivet e-barzh Bretagne-Mitterand, kannadig propagande ar P.S. da vare an dilennadeg-presidant. Kredet ho poa anezho ?

KELENNERIEN WAR AR BREZHONEG EN DESKADUREZH PUBLIK

K innig a ra an APLB meur a staj brezhoneg en diavaez-vro evit an deraouidi.

-E PARIS : d'an 22 ha 23 a viz Here 1988, d'ar 6 ha 5 a viz Du ha d'an 19 hag 20 a viz Du, d'ar 26 ha 27 a viz Du, 10 hag 11 a viz Kerzu, 17 ha 18 a viz Kerzu

-E LILLE (2 live) evit ar skolidi degouezhet gant an eil live : d'ar 5 ha 6 a viz Du, 20 ha 27 a viz Du, 17 ha 18 a viz Kerzu. (Mont e darempred gant "L'amicale des Bretons du Nord", Itron Harre (20-06.95.00) 167, rue du faubourg de Roubaix-59800 - Lille -

-E BRUSEL (evit ar vrezhoneg-erien) d'ar 15 ha 16 a viz Here, d'an 19 hag 20 a viz Du, d'ar 4 ha 5 a viz Kerzu. (Mont e darempred gant an Itron Blaise, Kuzul Etrevroadel evit Difenn ar Brezhoneg (672-60-21), 7, av. des tritons, 1170 Brusel. Kasit ho koulenn enskrivañ gant 800 lur belgiat. ■

KADOR DIEUB STROLLADOU BREIZHEK

EN DILENNADEGOU

N ebeut-tre a voterien a oa, dreist-holl er c'hêrioù. Dre c'hañs moarvat evit ar strolladoù breizhek a c'hallfe bezañ bet izelaet o dregantad mouezhioù c'hoazh.

Lavaret a c'hellomp emañ ar mutañ a bouez gant ar strollad koshañ, UDB, a zo gwiziennet gwelloc'h eget EMGANN (ar bloavezh kentañ dezho d'en em ginnig, gwir eo), ha kalz gwelloc'h eget POBL, a chom dianav en Emsav zoken.

Muioc'h eget 5 % a ra UDB e 6 kanton diwar 11, ar 5 all o vezañ e Bro-Naoned. Ar 15,61% e Malastreg a zisplegimp gant evezhañ ar PS eno. Gwelloc'h eget EMGANN e ra UDB e Breizh Izel, falloc'h avat e ra e Bro-Naoned, e-lec'h ma oa diaesoc'h.

Nec'hus eo evit UDB (hag an Emsav en e bezh) bezañ lezet tachenn Kerne, ha hini Leon dreist-holl, Kaval Diwan, d'ar "re c'hlas", a ra muioc'h eget 6 % e 4 c'hanton diwar 6 e Penn-ar-Bed. Marteze, abaoe disrann Frankiz Breizh (petra e teouant da vezañ ?) n'halle ket UDB ober gwelloc'h.

Ar "re c'hlas" avat a ra muioc'h eget 5 % e 18 kanton diwar 21, ha muioc'h eget 10 % e 4 c'hanton. Koulskoude e chomont a-drek UDB e Malastreg (10,69 %) ha Plouared (3,85 %).

Kement-se a c'hallfe dislokouez ez eus muioc'h a laz (interest) gant UDB hag an Emsav eget ouzhpenn ar re c'hlas-se ar re c'hlas led-PCFed Juquin, rak ar re c'hlas da vihanañ, evel an Emsav, a stourm a-enep ar c'hreizennoù nukleel hag an enklaskoù uraniom hag evit Naoned e Breizh, evel Ronan Danteg, Prezidant ar C'HUAB, a'n em ginnige e Naoned evit ar re c'hlas.

A-hend-all o deus displeriet Joel Parisse e Brest ha Xavier Jaouen e Lesneven e oant a-du gant "ar brezhoneg yezh ofisiel". Skrid-emginnig Jaouen a oa divyezhek zoken (skritur nevezleonek gant Goulc'han Kervella evit doare).

AN DILENNADEG KANTON				
MOUEZHIOÙ AR STROLLADOÙ BREIZHEK				
POBL	Bertrand Casteret	Roazon Hanternoz	57 mouezh	0,43 %
	Padrig Montausier	Roazon Kreiz-Kreiz	39 mouezh	0,27 %
	Padrig Guilbert	Roazon Norz-Reter	66 mouezh	1,74 %
EMGANN	Yann Pukilhandre	Kastell Nevez ar F.	143 mouezh	1,91 %
	J.Y. Kere	Gwengamp	205 mouezh	2,31 %
	Jad-Maria Salomon	Benaoc'h	109 mouezh	3,02 %
U.D.B.	Padrig Feilen	Naoned 6	128 mouezh	2,26 %
	Yves Evens	Naoned 10	157 mouezh	1,33 %
	Rene Boultenneg	Chapel an Erzh	141 mouezh	1,96 %
	Jean Groix	Rete	108 mouezh	2,88 %
	Kristian Pellin	St Herveles Korrog	105 mouezh	1,57 %
	A. Skourr	Bear	243 mouezh	5,75 %
	J.Y. Monnier	Lannou	530 mouezh	6,08 %
	Pi-an Hervec	Plouared	348 mouezh	6,72 %
	R.Perrot	Lanreger	357 mouezh	6,30 %
	Joel Gwengamp	An Oriant-Kreizreiz	429 mouezh	7,62 %
	Hangouet	Malastreg	789 mouezh	15,61 %

A-dra sur ez eus muioc'h da c'hoñit war an tu-se eget gant an tu kleiz gall na baouez ket UDB da c'hervel da votiñ e-vitañ (a-enep da EMGANN eta !)

en desped d'an troioù lous en deus bet c'hoarriet da Ziwan e Karaez pe e Banaleg.

"La Loire Atlantique en Bretagne : tonton l'avant promis", a embann UDB war he skritell diwezhañ. N'o deus mui e-zhomm prometiñ tra : UDB a zegas he mouezhioù evit mann. ■

Yann Leskildri

-57 mouezh hepen gant Pobl e Roazon-Hanternoz? Hag 20 mouezh hepen a vanke d'ur PS evit bezañ rampo gant an tu dehou en eil tro.

-E kanton Mordelles en em ginnige Yann Bernez Moazan, bet e Skol An Emsav, evit ar re c'hlas

-En Oriant e oa Daniel Gilles, bet e SAE, Ar Falz, UDB, o'n em ginnig evit ar PCF.

BEP DAOU VIZ LENNIT

AL LANV

59, hent

KERDRONDU VIVAN

29000 Kemper

KOUMANT BLOAZ 100 l

SKOAZELL : adalek 150 lur.




Ur banell nevez war hent skol Diwan Sant-Brieg.

MILINOÙ AN ABER BENEAD

LES MOULINS DE L'ABER-BENEAD

MILINOÙ AN ABER-BENEAD



Kant unan milin a zo war sterdachenn an Aber-Benead ! Piv en dije kredet an dra-se a-raok lenn Loeiz Bothorel ? Al levr-se a zo o paouez bezañ embannet gant Skolig al Louarn. Ul levr e galles, daoust d'e ditl diyvezhek, met ul levr talvoudus evit ar vrezhonegerien nemestra : an holl anvioù-lec'h a zo bet dalc'het e brezhoneg, re ar steroù, re ar c'hervadenoù, re ar milinoù evel just met ar re a zo bet gallekaet ivez. Ar pezh a zedenno muioc'h al lennerien c'hoazh eo geriaoueg teknikel ar milinoù (ouzhpenn 100 ger) a vez kinniget e brezhoneg.

Loeiz BOTHOREL en doa c'hoant skrivañ al levr-se a-baoe pell. Gwir eo, eo un istor a familh evitañ : bararierien e oa e dad hag e dad-kozh, hag e-touesk e dud-kuñv e oa teir familh vilinerien !

Kinnig a ra Loeiz Bothorel kartenoù resis gant an holl vilinoù, pep a anv brezhoneg ganto. Displegañ a ra da c'houde e oa ar milinoù un dra-bouez er vuhez, gwechall : aze e veze kejet gant an dud hag eskemmet keletier ar vro.

An Aber-Benead hag he adsteroù - ar Caro, an Dioudig, ar ster gkeraskod, ar Benouig, a zour ar vro eus Plabenneg, Plouviann ha Kochmeal betek Sant Pabu ha Landeda.

Loeiz Bothorel a ginnig deomp ar vilinerien : tud pizvidik avalc'h, marc'hadourien vat... merc'heterien ivez a-wechoù. Alies-tre e timez ar miliner gant merc'h ur miliner all...

Ar milinoù a zo bet savet war ribl an adsteroù ; n'eus hini ebet war vord an Aber : gant al larv e vije beuzet ar rodou. A-wechoù eo tost kenañ ar milinoù an eil eus eben, e Plougin da skouer ez eus seizh milin war ur c'hilometr.

Un darn eus al levr a zo gouestlet d'an istor, d'ar soñjoù-glezh ha d'an ekonomiezh ; un darn all liammet n'eus forzh penaos gant an hini kentañ, a zo gouestlet da deknik ar milinoù hag ar pezh a vez savet tro-dro : kanolioù, skluzioù, ranvelloù...

E-barzh al levr n'eus kaoz nemet eus ar milinoù o deus troet er c'hantved-mañ met er c'hantvedoù tremenet e oa reoù all, milinoù avel ivez moarvat met n'eus mui roud anezho.

Displegañ a ra Loeiz Bothorel e oa meur a seurt rodou : ar rodou sonn gant ahel plann (galegen, koajel, koazegel) hag ar rodou plann gant ahel sonn (krufel). Displegañ a ra ivez gant tresadennoù penaos ez e an dro ar vein vilin, an troell-rojoù ha da c'houde ar milinoù ruilhioù.

Lod eus ar 101 milin-se o deus troet betek kreiz ar c'hantved-mañ, met hiriv an deiz gant tresadennoù penaos ez e an n'eus nemet c'hwec'h anezho o vont en-dro.


Ar skolaerien hag ar gelennerien a gavo el levr-mañ danvez evit meur a gentel : istor, teknologiezh... Met dedennus e c'hell bezañ evit an holl, ar re vihan kouls hag ar re vras.

M. A. M.

Lennit al liamm

Skrivañ da : AL LIAMM
16, stradaed des Fouts à Chaux
35400 - SAINT MALO -

Koumanant bloaz 120 kur (studierien, tud dilabour : 100 kur)



KASEDIG-VIDEO

N'ez deit er-maez : "YANBER KALLOC'H" (1888-1988) ur gasedig-video diwar-benn er festoù a zo bet graet e-koum ar barzh BLEIMOR. Kensa-veit eo bet get :

- "Kantved Bleimor"
- "Image et Son"
- "Dastum"

Priz ar gasedig a zo 250 lur gall. Skrivañ da Y. Baron Kergouarec - 50400 Brec'h - pe pellgomz dezhañ : 97- 24.57.07.

GLIZHARC'HANT

TAOLENNOU AN AMZER A-VREMAN GANT FANCH PERU



zomp emañ Fañch Peru o chom war an dachenn.

An elfennoù-se a gavomp ivez, a-strew, e lennegezh Vreizh :

Ar frammañ "dre daolennoù" ez eus anezhañ e Papiers Collés Georges Perros, hag ivez e Kregin-Mor Maodez Glandour. Un dastumadenn notennou kenstrollet eo al levr-preder-mañ, ken start an danvez anezhañ hag hini ul levr-preder all e-giz *Comment peut-on être Breton ?*, dezhañ ur framm klasel.

Al levr tostañ ouzh ar "c'hazetennerezh nevez" avat a zo, hep mar na marteze, Itron Vario Garmez gant Youenn Drezenn, pizh e oa anaoudegezh ar gevredigezh, ur c'hazetennerezh a-vec'h e oa, hag ur mailh ken na oa war ar c'hendivizoù dezho blaz ar wirionez, blaz ar vuhez, -un heuliad taolennoù eo e romant ouzhpenn : "Da d'hañ an o-berenn, eme Roparz Hemon, ez eo gwelloc'h he lenn a damoù, pajenn amañ, pajenn ahont, ha neuze e c'haller barn he zalvoudigezh, a zo bras..."

E-mesk an diagentidi lakaomp ivez Lan Inisan gant Egan Kergidu, a zo un heuliad taolennoù, ha Du Terajji chez les Pennsardin, bandenn-dreset Charles Kerivel. Nemet ne oa ket eus al levrioù-se, pa oant bet embannet, "taolennoù eus an amzer a-vremañ".

Ar c'hazetennerezh, a-hend-all, en deus kresket e bouez er c'hendivizoù amezev. Gant ar c'helc'her ez eo bet kemeret plas ar pedennou, kouls lavaret : diouzh ar beure, ouzh taol, a-raok mont da gousket. Neb na seloau ket outo a vez sellet a-dreuz outañ.

Hor c'hevredigezh-ni a zo e-giz ar re all. Gwad nevez a zo bet degaset d'ar skingomz brezhonek gant Fañch Broudig pa eo en em lakaet da ginnig ke-lerier, e 1969 : *"Rat e oa kinnig d'ar vrezhonegerien, en o yezh, un doalenn glok eus ar pezh a ra buhez ha prederioù an dud e-barzh ar vro-mañ, ar c'hoant an eus bet ivez da reñ ar gaoz d'an dud, da reñ dezhe ar tu d'en em zisplegañ."*

Hon div gelaouenn yaouankañ a zo troet gant ar c'helaouini, anat eo evit BREMAN, gwir eo evit AL LANV, dezhi da embann ur rann lennegezh, a zo deuet war-lerc'h (en "news" arabek e vez embannet forzh barzhonegoù ivez).

N'eus ket tu ken distagañ ar c'hazetennerezh diouzh al lennegezh, an eil a vez diouzh egile, ha n'eo ket souezhus gwelet ur "romant kazetenn" o tont er-maez. Ma chom bras plas ar faltazi, an hiniennouriezh hag ar bugaleaj en hol lennegezh ez eo, mui pe vui, abalamour ma'z eo isdiorennet hor c'hazetennerezh, e Breizh hag e Brezhoneg.

Ne dalv ket kement-se ez eo al lennegezh hag ar c'hazetennerezh an hevelep tra, -eskemmou a vez etrezo hepken. Skrivagnerien vat hon eus, evel Yann Gerven, Alan Botrel pe Gwendalenez. Dre skrid, n'hon eus ket a wir gazetennerezh, -kazetennerezh a dizhe live hor gwellañ skrivagnerien, e zoken, hini hor gwellañ sonerien.

Gant Glizharc'hant emaoomp en ur c'hroazhent etre al lennegezh hag ar c'hazetennerezh. Perzhioù mat all a zo gant levr Fañch Peru : komzet en deus an amzer eus pezh a gare, dibabet en deus ur stum-danevell a zereze ouzh e vennad, -ar "romant-kazetenn", kredet en deus ste-kiñ ouzh an amzer-vremañ. En a-beg da se en deus savet ul levr kempouez, hep hirderioù, ha flour ar brezhoneg anezhañ.

Spi hon eus e krogo tud all en o fluenn evit sevel d'eo zro taolennoù hon amzer a-vremañ. ■

Paskal ar Marc'heg

Glizharc'hant, Fañch Peru, SKOL VREIZH/Sterenn - 138 pajenn - (Ur skrid all a zo mesket ennañ kazetennerezh ha lennegezh eo "Un Dro-Vale", Erwan Kervella, e-barzh Yud, mouladurioù Hor Yezh - 1985).

DUDI


LEVRIOU DA LIVAN

D au levr "DA LENN HA DA LIVAN" evit ar vugale skol -vamm ha kentañ derez a zo nevez deut er-maez. Daou istor simpl, treset brav "LANIG" (30 pajenn) ha "KOULMIG" (35 pajenn). Ment 21x29,7, strollet gant ur "winterell" plastik (golo liv). Priz an tamm: 25 l. Gouenn anezho digant Embannadurioù SKOL AN EMSAV 8 ru Hoche 35000 ROAZON - Pgz 99.38.75.83.

(20 lur an tamm adalek 10 levr + 15 % frejoù kas dre ar post).

☆☆☆☆
gouennit levrioù all dastumad "Lenn ha livañ"
-NOLIG AN OLIFANT
-AN AOTROU NIJ
-LANIG
-KOULMIG
skol an emsav 8 straed Hoche
35000 roazon - 99.38.75.83.-

☆☆☆☆



Goude-se ez a da c'haloupat e-barzh ar parkoù nevez-aret war-lerc'h ar minoc'hed.



ha Koulmig da ouelañ dourek.

LENNERIEIEN VAT

N'omp ket evit gouzout petra c'hoarvez en ho pro ma ne gasit ket keloù dimp. Gortoz a reomp eta diganeoc'h keleier, pennadoù, tammoù kazetennoù zoken, lizhiri, alioù...

BREMAN

skoazellit
"bremañ" ho kelaouenn
koumanantit,
adkoumanantit buan!
120 lur ar bloaz nemetken!

8, STRAED HOCHÉ 35000 ROAZON

Gerioù kroaz

GERIOU KROAZ MIZ HERE 1988

	I	II	III	IV	V	VI	VII	VIII	IX
1									
2									
3									
4									
5									
6									
7									
8									
9									
10									

A-SERZH

- I. - Plijus - Arme -
- II. - Er vag - Simpl -
- III. - Bouch - Notenn -
- IV. - Pesked - Poull-kannañ -
- V. - Ger-mell - Skoazellañ -
- VI. - Ar Gwalarn - Legumaj -
- VII. - Eus ober - Falud -
- VIII. - Ger-mell - Eus bezañ -
- IX. - Krec'h - Deuet -

A-LED

1. Yezh relijiel -
2. Eus bezañ - Evit arat -
3. Traezhenn - Digudenn -
4. Gouel -
5. Hent - Notenn - En Galed -
6. Ne die ket bezañ brav da wlet hini ar vezverien - Ouzh an troad -
7. Raganv gour - Bont -
8. Any plac'h -
9. Gwidreus - Teñval -
10. Stêr - Penn onest -

RESPONT GERIOU KROAZ MIZ GWENGOLD

	I	II	III	IV	V	VI	VII	VIII	IX
1	G	R	O	U	G	O	U	S	
2	W	A	R	O	A	L	E	D	
3	A	D	T	A	N	T	E		
4	D	A	E	P	E	G	U	S	
5		R	O		D	A	K		
6	B	G	E	O	S	A	E		
7	U	F	E	R	N	T	N	T	
8	T	A	D	E	E	K			
9	U	L	L	S	D	O	A		
10	N	L	U	T	S	U	L		


PAJENN AR VUGALE !!!

Strobinellerezh !

Ret eo deoc'h kaout : un asiedig (eus ar seurt a vez lakaet dindan an tasoù), ur werenn, un alumetezenn, ur gontell, ha dour.

- 1- Skuilhit ur banne dour en asiedig.
- 2- Gant ur gontell e lemmit an alumetezenn e stumm un trebez (3 zroad dezhi). He lakait e-kreiz an asiedig.
- 3- Lakait tan en alumetezenn hag he goloit kerkent gant ar werenn.

GWELET A REOT AN DOUR O PIGNAT ER WERENN BETEK AN DIWEZHAN TAKENN... HAG HO MIGNONED A VO SEBEZET-NAET



C'hoariomp !

1	○	○	○	○
2	○	○	○	○
3	○	○	○	○
4	○	○	○	○
5	○	○	○	○
6	○	○	○	○
7	○	○	○	○
8	○	○	○	○

1. Div evit ur marc'h-houarn
2. War vord ar mor.
3. Boued a blij d'ar babigoù.
4. Houarn pe bri.
5. Graet d'ar re a garer.
6. Da lakaat war ho penn.
7. Kanañ a ra pa sav an deiz
8. Hoc'h hini vo tev mar debrit re.



Diskoum c'hoari an Nnn 84 : mat-mab-man-ran-tan-tad-gad (Mich Beyer)

bremañ 19

MESK DIVESK

Digreskiñ buan a ra niver ar veleien er mare-mañ e Breizh, anavezet eo. E departamant Il-ha-Gwilun da skwer, e oa 1200 anezho e 1940, pa 'z eus 736 hiriv, ha pa ne vefe nemet 380 er bloavezhioù 2000. N'eus ket kalz a zanvez-beleien kennebeut : un tregont bennak e Gwened ha 25 e Roazon.

Un dra vat marteze ? Ya, met n'emañ ket evel-hen e pep bro, siwazh, ha kenderc'hel a ra an lliz gant an trevadenne-rezh er bed a-bezh : 406 376 beleg en holl e 1983, da lavarret eo un digresk a 6 % abaoe 1873, met er bloavezhioù diwezhañ e vefe bet cheñchet penn d'ar vazh ! ■

Ne vez ket savet ilizoù-meur dre amañ kennebeut, chapelioù hag ilizoù a vez gwelet o kouezhañ en o foull, kentoc'h. En Afrik e vezont savet bremañ.

Emañ DUMEZ (unan eus brasañ embregerezh savadur e Bro-C'hall) o plediñ gant Iliz-Veur HOUPHOUET-BOIGNY e YAMOUSSOUKRO-peadra da reiñ labour da 1500 den-. Bras a-walc'h e vo ar savadur evit 7000 den azezet hag 11 000 den en o sav, ha plas a-walc'h evit bodañ 300 000 den tro-dro. Pegement e koust ? Den ne oar.

"Ar re wenn ne fell ket dezho o defe ar re zu traoù brav evelto" eme Felix. Un dibab eus ar c'hwekañ a oar ober e broioù ar C'hornog, betek an doare da lakaat ar re baour, en e vro, da sevel savadurioù en enor da zoue ar renerien, evel er Grennamzer, amañ. ■

Abae kantvedoù e veze enoret ha doujet un tamm liñsel e Iliz-Veur TURIN evel ma vefe bet linsel dasoc'hidigezh J.K., dre ma oa roudoù ur penn hag ur c'horf warnañ.

E 1694, en doa embannet ar Vatikan ne oa ket sur an danvez da vezañ ken kozh-se, met lezet e oa bet eno memestra (Petra eo ar Wirionez ?).

Er bloaz-mañ eo bet embannet gant an "Evening Standart" disoc'hoù ur studiaden war al linsel, en ur implijout ar c'h-K14 evit termeniñ ez-resis e oadvezh. Douetañs ebet : krouet eo bet 1350 ! ■

E1564 e tenn GALILEO GALILEI e anal gentañ e PIZA, unan eus kêrioù brasañ du-gelezh FLORANS. E 1600 oa bet rostet GIORDANO BRUNO gant lez-veur-enklask an Iliz, abalamour d'e skridoù o reiñ pouez da venozioù COPERNIC (1473-1543) : emañ an Douar o treiñ en-dro d'an Heol, ha n'eo ket ar c'hon-trol an hini eo. E 1610 e vez embannet gant GALILEI e levr MEDICEA SIDERA (kannad ar sterred) o tezrevellañ e gavadennoù gant sikour al lunedoù-hir krou-et gantañ.

E miz Even 1633 emañ GALILEI dirak lezvarn veur an Iliz, e-lec'h ma teurvez dinac'h e soñjoù hag e skridoù evit chom bev.

E 1822 e oa bet embannet ez-ofisiel gant an Iliz emañ an Douar o treiñ en-dro d'an Heol!

E 1987 eo bet anzavet gant ar Vatikan e oa bet ur faziadenn prosez GALILEI !!! ■

Ne oa ket bet souezhet bras parrezianiz ETREPIGNY, e-kichen MEZIERES (en Ardenes) pa varvas o beleg kozh e miz Genver 1729 : war an diskar e oa abaoe mizvezhioù, hanterdall e oa deuet da vezañ, prest e oa an holl da welet an Ankou o tont da gerc'hat ar person en doa servijet ar barrez e-pad 40 bloaz.

E genseurterd avat, ar veleien diwar-dro, a oa bet darbet dezho fallaat en ur ober war dro e gorf er presbital. Daou lizher en doa lezet MESLIER war-wel en ti : an eil a zisklerie dija en doa bet maget kasoni e vuhez-pad ouzh e garg a veleg e ETREPIGNY ; egile a zisplege fraeshoc'h e soñj a-enep d'ar relijion, d'ar binvideien, d'an noblañs ha d'ar roue. Ul levr 366 pajenn a oa er presbital ivez : "Menoziou ha prederiadennoù MESLIER" o tibunañ eizh prouenn diwar ar relijion :

-ijinadennoù an den eo an holl relijionoù, tra ken.

-ur falskredenn eo ar feiz.

-n'eo an diskleriadur doueel nemet skraperezh.

-direizh ha nozus eo diazezoù ar relijion katolik.

-un harp eo da waskerezh an u-helidi.

-sot ha diret eo menoz un doue.

-erfin, n'eo na peurbadel na speredel an ene, o vezañ m'eo pep tra danvezel.

N'eo ket diamzeriet e skridoù daoust ma 'z eus bet skrivet sklaeroc'h diwar-se abaoe, hag ur c'holl-amzer e vefe sevel bandennoù treset pe tresadennoù bev diwarno : seurt danvez a vank da yaouankizoù ar vro. Met n'eo ket echu an istor. ■

Nec'het bras e oa ar veleien evit douariñ an den : dibosubl ul lid relijiel dre m'hen doa dianzavet e feiz, diaes brudañ e venozioù d'e barrezianiz en ur ober un interamant digristen.

War-lerc'h meur a barlan-tadegoù etre kargidi an Iliz e oa bet douaret MESLIER e liorz e brespital, ha roet da c'houzout e oa deut sot a-raok mervel, dalc'het gant an Diaoul, hag an droug-spered.

Brud a savas buan en XVIII kantved en Europ a-bezh en-dro d'ar beleg ha d'e skridoù : meur a destenn anezho a oa bet skignet gantañ dija. Ar pezh a dalvezas dezhañ bezañ enoret er c'h-Kremlin e-touez "diaraogidi ar sokialouriezh skiantel". Kuitaet an Iliz gantan, adkavet unan all. ■

DIDEROT, VOLTAIRE, B. RUSSEL, FREUD, MARX a zo bet skrivet ganto traoù brav diwar benn ar relijionoù, skridoù hag a vez diwallet mat na vefent studiet er skolioù evel-just.

Met petra bravoc'h, gwelloc'h, saourusoc'h, barzhekoc'h eget NIETZCHE war an danvez-se ? 100 pajenn nemetken en e levr AN ANTEKRIST (1888), kant pajenn evit kompren istor an den a-hed 2000 bloaz. Pep linnenn a vefe da venegiñ : "Kompreneton bet. Petra eo an dañjer evit ar beleg ? ar skiant, da lavaret eo an ere devouder-devoude. Met, dre vras, n'emañ ar skiant en e vleud nemet en degouezhioù eurüs : ret kaout amzer, ur spered dieub ma fell d'an den mont war raok war dachenn ar ouiziegezh. Setu perak eo ret d'an den bezañ gwal-leurüs. Hervez ar menoz-se e weler diouzhtu pezh a zo bet ijinet evit-se : ar pec'hed... Keal ar pec'hed hag hini ar c'hastiz a zo ijinadennoù enep ar skiant, o virout ouzh an den da bellaat diouzh ar beleg..." (pennad 49). ■